




PHOTO JOS LE DOARÉ

Eun ti nevez e Porz-Meneh
(Arch. J. Lachaud)

BLEUN-BRUG

Niv. 112 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

GOUERE-EOST 1958

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur koum. a enor — 1.000 lur koum. madoberour) da :

**Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.
C. C. P. 1541.90 Nantes.**

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**
Mar fell deoh beza ezel euz ar **Bleun-Brug** pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

**V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist
C. C. P. 544.22 Nantes**

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

Dirag an eost o tarevi , gand L. B.	1
Bleun-Brug Pont'n-Abad , gand J. C.	2
Bleun-Brug Perwenan , gand P. Bourdellès	3
Evid saludi , gand Brogarour-Rozec	5
Diwar-benn ar Baganiz , gand Job Séité	6
Mem bro e zo du-hont , gand Loeiz Herrieu	8
Kontadenn Bizai (kendalh), gand Mab an Dig.....	10
Ar mél alaouret , gand Mab Koad an ed.....	14
Gwerz ar mevel maro , gand Yeun ar Gow.....	16

Deut eo er-mêz niverenn 7 « **Les Cahiers du Bleun-Brug** ».
Ar houmanant da « **Bleun-Brug** » ne dalv ket evid reseo « **Les Cahiers du Bleun-Brug** ». Evid o haoud, skriva da : **Jean Cormerais, Professeur au Lycée de Garçons, Rennes. C.C.P. 77.60 Rennes.**

Koumanant-bloaz : 200 lur.



133864

Dirag an Eost o tarevi

Setu c'hweh ha seiz miz 'zo, ar houeriad e-noa freuzet e zouar, dibabet ar greun mad hag hen taolet en dachenn. Abaoe, e-pad e gousk koulz hag e-pad m'oa dihun, en noz evel en deiz, dre nierz ar glao hag an heol tomm roet gand Doue, ar greun a zo diwanet anezo o-unan, ar parkeier a zo en em holoet a hlazvez, ha nebeud ha nebeud, goude-ze, a bennou. Ha bremañ, ar pennou-ze hag a welom ken brao o heja, o wagenna, o c'hoari dindan an êzennig avel, a zo oh en em vaga euz kalon an douar, evid beza ar pennou-ed a roio deom danvez-bara.

Da geñver pedennou ar Rogasionou or-boa goulennet digand Doue lakaad an douar da rei deom frouez ha danvez.

Selaouet om bet !

Miz gouere eo miz an ed o tarevi er parkeier. « Savit ho taoulagad ha gwelit ar mêziou gwenn dija evid an eost. »

Ar re goz a lavare :

Da viz gouero

Lakaad ar 'falz war an ero.

Dre vadelez Doue, eost douarou Breiz e-neus doare adarre da veza puilh er bloaz-mañ. Med siwaz, bihan e vezo ar zikour evid e zastum.

A vloaz da vloaz ar hêriou braz a lonk hag a skrab diwar ar mêziou bleuniou kaerra o yaouankiz. Spontet e chomer o weled an niver brasoh brasa a briejou yaouank a guita o 'farzeziou evid mond da glask bara eurusoh. Al labour douar a zo re denn ha ne zigoll ket ar boan a zo gantañ, siwaz !

An eost a zo o tond. Penaoz e vezo greet ? Gand kalz re nebeud a zivreh, heb mar ebed, hag e heller kredi, gand e-leiz a skuizder.

Tud ar hêriou braz a lavaro : « O ! bremañ ez eus leun a mekanikou da zizamma an den. » Gwir eo, med ar mekanikou a rank kaoud divreh kreñv ha kalonou yah evid o ren, hag ouspenn, goude mond mad en-dro, ne beurhreont labour ebed.

C'hwi hag a hello, e-pad eun nebeud sizunvezioù sevel ho kein ha mond dibreder dre henchou or bro evid aveli ha penn, klaskit kompren gwelloc'h poaniou ho predeur chomet feal d'an douar. Zoken evid eost ar bed-mañ e teu da veza gwir komzou Or Zalver : « Braz eo an eost, med tano eo niver an eosterien. » Grit eun dra bennag, kement a zo en ho kalloud, evid skañvaad samm bounner ar re a boagn da zerhel d'or Breiz karet yehed ha teñzorioù kaerra or ouenn.

L. B.

Bleun-Brug Pont-'n-Abad

22 a viz Mezeven 1958

Kalzig euz on lennerien a zo bet e Pont-'n-Abad en dervez-se. Ar re all o-deus lennet ar pennadou niveruz ha gwelet gand plijadur ar skeudennou brao a zo bet d'an ampoent war oll gazetennou ar vro. N'eo ket 'ta ar mare da zanevelli dre ar munut peseurt gouel kaer eo bet Bleun-Brug Pont-'n-Abad. Klask a raim evelat derhel soñj euz an dervez-se ha tenna dioutañ ar henteliou a vago or spered el labour a raim a-benn goueliou ar bloaz a zeu.

Gouel Pont-'n-Abad a grogas gand eun abadenn sonerez, d'ar zadorn diouz an noz, roet gand laz-seni « Son ha Koroll » Brest ha « Kanerien Bro-Leon » Landi. Brao eston ha kenteliuz dispar eo bet an nozvez-se, o rei tro da gleved toniou dudiuz or bro ha re ar broiou keltieg tramor. Digoret e oe gand an Ao. Bernard de Parades a veulas al labour greet gand ar Bleun-Brug evid rei da draou Breiz al leh a zere outo e buhez or bro.

C'hweg meurbed eo ar « hanou an noz », dérlhent peb Bleun-Brug, med an dervez brasa a jom ar zul gand e genstrivadegou hag an overn-bred diouz ar mintin, an abadenn « Kan ha Koroll » hag ar brosesion goude kreisteiz. Hag ar zulvez-se a zo bet lavaret anezi gand gwir abeg, eo bet penn-da-benn gouel ar Vro-Vigoudenn.

Diouz ar mintin, da genta, Klevet on-eus 400 a vugale o tond euz 21 skol, an oll anezo strewet er horn-bro, nemed re Pont-e-Kroaz, Kerfeunteun, Elliant hag al Likès. Se a zo kaer tre evid Bro-Gerne hag a zikouez pegen talvouduz eo labour ar Bleun-Brug er skoliou, e Bro-Gerne koulz hag a leh all. An darn vuia euz ar skolidi-ze o deus kenstrivet war ar han hag an displega. Rouez kenañ eo bet ar re o-deus savet eur pennad-skrid brezoneg. Red e vo teurel evez ouz an dra-ze er bloavezioù da zond, peogwir e teu bremañ a-vil-vern daved renerien ar Falz ar pennadou brezoneg savet er skoliou laik. Ma n'o deus ket skrivet kalz, bugale ar Vro-Vigoudenn o-deus kanet ha displeget brao ar hanaouennou hag ar mojennou o-devoa desket. Eur frealzidigez dispar e vez atao evid ar Vretoned a gar o yez kleved mouezioù skiltr pe 'flour ar re vilhan o tistaga ken brao ar brezoneg. N'eus ket deuet kalz tud da gana kanaouennou-pobl pe da gonta rimadelloù. Plijadur on-eus bet, evelat, o selaou eur paotr distagellet mad. N'eo ket ar gonterien nag ar ganerien eo a vank e Bro-Gerne, med red e vefe da vignoned ar Bleun-Brug o lakaad da zond niveruz d'ar honkourioù-ze, evid o flijadur ha dudi o henvroiz.

D'a 11 h. 30 en em vode eur boblad tud e koad Sant Laorañz, dirag an aoter, evid an overn-bred a oe kanet gand an Ao. Chaloni Nedeleg. An Ao. Chaloni Coadou, en eur brezegenn c'hweg renket en eur brezoneg yah hag ez da gompren, a veulas kaerderioù ar vro vigoudenn ha feiz divrall he 'fobl. Lavaret a reas bennoz da Zoue evid kement e-neus roet d'ar Vretoned ha pegen mad eo d'ar re-mañ meuli o Hrouer en eur ginig dezañ oll binvidigezioù o bro, o gwis-kamanchou kran douget gand eur maread a vugale, o hantikou dudiuz diskanet gand eur mor a dud. Froum euz eo bet evid meur a hini kleved ar beleg gouizieg-se oh embann d'an oll menozioù diazez ar Bleun-Brug. Niveruz eo bet ive an dud a gomunias, o tiskouez evel-se feiz yah kristenien bro Pont-'n-Abad.

Goude kreisteiz e tirede niveruz an dud da gemer o 'flas war an derezioù dirag ar podiom, e disleol ar gwez, a-wel d'ar ster leh ma touaras Sant Tudi gwechall. Kelhioù, bagadoù ha lazou-kana a zeuas, diouz tro, da laouennaad, dre o horolloù skañv hag o zoniou drant, an engroez-tud a weled en he hreiz an Ao. 'n Eskob Favé, pennou braz kêr ha re ar Bleun-Brug. An abadenn a echuas gand c'hoari « Ar Vro Vigoudenn », taolennou beo o displega darvoudou brasa istor ar vro-ze. Ster an taolennou-ze a oa diskleriet e galleg hag e brezoneg tra ma oa kanet, gand « Kanerien Bro-Leon », kantikou brezoneg o klota ouz an dud vrudet pe an darvoud braz a weled taolennet war ar podiom.

Echu ar c'hoari e oe poent ar brosesion da bignad war ar podiom, pe gentoh, ar c'hoari a droas, nebeud-ha-nebeud, da brosesion. Tremenn a reas bannieloù eskoptioù Breiz, oll bannieloù ha kroazioù ar Vro-Vigouden ha skeudennou karet ar Werhez, douget hag heuliet gand o farrezioniz, sioul ha meurdezuz an dalh anezo. Goude beza treuzet kêr e tistroas ar brosesion da goad Sant-Laorañz, dirag an aoter, evid bennoz ar Zakramant. Eno, an Ao. Falc'hun, kelenner e Skol-Veur Roazon, goude beza benniget ar bobl, a drugarekaas en e vrezoneg c'hweg, an oll dud o-devoa kemeret perz er Bleun-Brug en eur lavaret pegen eüruz e oa o weled ar brezoneg hag al levnezh kristen staget evid mad an eil ouz egile.

Honnez eo brasa kentel Bleun-Brug Pont-'n-Abad, hag ar menoz a ranko maga or sperejou ma fell deom rei d'or yez ha da gement tra a ra ene or pobl eul leh deread er bed a vremañ.

J. C.



Bleun-Brug Perwenan

22 a viz Mezeven 1958

« An diaoul koz a oa er-mêz, en nozvez ma reas burea Bleun-Brug Treger-Goelo-Kerne, e Perwenan, ar goañv-mañ, e vodadenn genta evid klask harp da aoza ar gouel. Eun nozvez C'hwervrer, an avel hag an erh o yudal, ar zal-goad m'edom enni o tifreta evel eur vag war ar mor dirollet, ar yenijenn o sila etre ar plenek... Brr !

Ar halonou, avad, a oa tomm.

Hag evel-se eo bet kont penn-da-benn, abaoe. D'an 22 a viz mezeven on-eus lidet eur gouel kaer dirag eur bobl-tud, med an avel a oa yen, hag an oabl ne ouie war be du trei, pe du an heol, pe du ar glao... An oll, avad, a oa prest da gemer koust ha poan evid ar Bleun-Brug, rag hemañ a zo deut da veza tra an oll, hag an oll a oar eo ar Bleun-Brug ar strollad a gar ar Vretoned hag a labour evito.

Bureo Treger-Goelo-Kerne a zo deut a-benn d'ober gand B. B. 1958 Bleun-Brug an nevezintioù hag ar vignoniezh.

1. BLEUN-BRUG AN NEVEZINTIOU.

Er henstrivadegou, diouz ar beure, da heul ar skoliou deut a-dost hag a-bell (beteg euz Kallag ha Lenven) e oa, evid ar wech kenta, krennarded ar skol vrezoneg kenta krouet e Breiz : skolidi Sant-Erwan, euz Ploueg-ar-Mor.

Eun nevezinti a oa evidom ive gweled Aotrou'n Eskob Sant-Brieg o paeronia eur Bleun-Brug bihan, hag o sevel war ar podium da alia an oll da lakaad o fiziañs er Bleun-Brug hag o nerz d'e harpa.

Eun nevezinti eo bet gweled ar hêrioù o kemer kement a lod en eur Bleun-Brug lidet war ar mêz : laz-kana Gwengamp eo a ganas en overenn-bred ; skol-dañs ar « Joinvillaise » euz Lanuon (merhed aotrounez kêr enni) he-doa

savet eur horoll war eur zon goz vrezonég : « Janedig ». Ar zon a oa kanet gand Soaz Kavan, euz Lokemo, 76 vloaz dezi. Aozerez an dañsou a oa an dimezell de Sagazan, euz Lanuon. E sell ema-hi da zerhel gand an hent-se, ma labouro koz ha yaouank, mēz ha kêr, da adnevesaad teñzoriou Breiz.

Eun nevezinti c'hoaz e oa taolennou Buhez Sant Weltaz. Sant Weltaz eo an anavezeta euz or zent koz. Peadra a oa eta da zevel war e vuhez taolennou c'hoariva a zo buhezeg-tre, a zo plijet meurbed, hag a vo adc'hoariet e-leh ma 'z eus devosion da Zant Weltaz : eur gonid evid ar Feiz hag ar brezonég.

2. BLEUN-BRUG AR VIGNONIEZ.

An nevezinti kaerra, avad, eo ar vignoniez hag an doujañs diskouezet gand an oll d'ar Bleun-Brug. E-touez ar pennou-braz deut d'ar gouel edo Aotrou'n Eskob Sant-Brieg ; an aotrou Vikel Vraz Brochen ; rener skoliou kristen an eskopti, an Ao. Gloaguen ; daou zéputé, an dimezell Dienesch hag an Ao. Guil-lou ; an Ao. Is-prefed Lanuon hag e itron ; kuzulier jeneral Lezardreo, an Ao. Marrec ; pen S. I.-ou on departamant, hag all...

E-touez aozerien ar gouel e oa heveleb emgleo : an Ao. Person, an Ao. Mēr, Perwenaniz koz ha yaouank. Med a belloh c'hoaz e teuas skoazell :

Eur ger a drugarez da Ouest-France evid ar pennadou hag ar poltredou, talvoudenez meur a bajennad anezo, heb konta meur a zervij all...

Unan all da abati Kervenead, d'an Tad Gweltaz dreist-oll, e-neus pourvezet dim danvez buhez ar Zant... d'an hini e-neus c'hoariet roll ar Zant, ha lakeet an oll estlammet, an Aotrou Breton, person Plougras ; d'ar veneh... hag a oa gwir veneh : Breudeur bihan Jezuz, euz breuriez an Tad Foucauld, gand an Tad René, o zad-priol en o fenn.

Ha d'an oll strolladou deut a beb tu, ha d'ar skouted o-doa aozet kinkladur evid ar podium.

Ar skoazell-ze deut a beb tu eo gwella skouer a oufed da gaoud, da destenia eo deut Bleun-Brug Treger-Goelo-Kerne a-benn da unani an oll, da hounid doujans ha fiziañs an oll dre forz pleustri hent dispart an Aotrou Perrot, an Ao. Lec'hvien hag ar Yeodet, dre forz lavared hag adlavared sklēr d'an oll :

Ma ne fell ket deoh gweled on ilizou goullo hag on skoliou kristen o vervel...

Ma ne fell ket deoh gweled ho pugale o vond da vicherourien komu-nist e Pariz...

Ma ne fell ket deoh beza dilezet ganto ha mervel en ospital...

Neuze eo red :

Kroui labour d'ar re yaouank ma hellint chom er vro...

Kroui enno c'hoant da jom er vro ; hag evid se eo red rei dezo da anaoud pinvidigeziou, kened, istor, yez Breiz...

Hag he Feiz...

Piou a zislavaro ?

P. Bourdellès, beleg.



EVID SALUDI

Er hēriou, an dud n'en em zaludont ket, nemed mignoned e vefent pe anaoudegez an eil d'egile.

War ar mēz, avad, pa zegouezer an eil gand egile, e vēz distaget atao eur gerig bennag.

Ar homzou distaget a zo niveruz ha disheñvel. Aliez e vezint tennet diwar an amzer a ra :

— « Brao eo an amzer. » — « Braoig eo avad, hag ez eo. »

— « Avelaj a zo. » — « Fei ! C'hwezenn greñv a zo. »

— « Tomm eo an amzer. » — « N'eo ket yen avad. »

— « N'eo ket tomm hirio. » — « Lavarit 'ta ez eo yen. »

Aliez awalch ivez e vezo toullet ar gaoz diwar-benn ar bale.

— « Ahan 'ta ! Mond a reom ivez ? » — « Ya ! Koulz eo. »

— « Poent eo sacha. » — « Gwir a-walh, e tlie beza tost d'an taol. »

— « O tond en-dro ? » — « Ya, greet an dro. »

Pe diwar-benn al labour pe ar stad ma vezer enni.

— « O c'hwennad eo ? » — « O c'hwennaad. »

— « Da garga eo ? » — « Ya, da garga. »

— « Eur harrad 'zo ? » — « Eur harradig a zo. »

— « Eun ehan a zo ? » — « Eun ehannig a vez greet. »

— « Eur horniad a zo ? » — « Eur horniad... diouz ar butun. »

N'om ket evid soñjal linenna amañ an holl varvailhou a haller da glevet war en hent pe er gêr pa zegouez gand an dud en em weled.

An homzou-mañ a vezo diouz ar beg-douar, diouz temz-spered an den, diouz e spered hag e deod. Eun dra vad, n'eo ket 'ta, en em zaludi evel-se, evel kristenien, evel bugal d'an heveleb Tad hag a zo en neñv.

Med perag e teu muih-mui ar hiz en on touez da zervija galleg pe hanter hialleg hag hanter vrezonég, da ober re aliez eur bannē gwelien euz an diou yez ?

— « Beau temps a ra ! » — « Beau temps a zo. »

— « Bonjour ! » (hag a vezo distaget gand an taol-mouez war *bon* ha n'eo ket war *jour*.) — « Bonjour ! »

Bonjour e brezonég a vez lavaret *demad* ! (devez mad).

Ma kavit diēz distaga ar gêr-ze — dre ma n'oh ket boaz d'ober gantañ — lavarit traou all.

E meur a vro gristen, an dud a ro ar zalud-mañ an eil d'egile :

— « Laudetur Jezuz-Krist ! (Ra vezo meulet Jezuz-Krist !)

— « In æternum » pe « In perpetuum » pe « Per Mariam ». (Da viken, pe : dre Vari).

Nebeud a dud a jom digor o genou ganto pa glevont ar zalud-se :

— « Doue ho pennigo ! » Ar peb brasa a oar mad respont : — « Bennoz Doue deoh ! »

N'ouzon ket perag emañ ar hiz gand mammou a zo da lakaad o bugale da gas ar gêr galleg « *Merci* » evid trugarekaad, pa 'z eus eun doare-lavar ken kaer e brezonég evid kement-se : « *Bennoz Doue* ».

— « Lavar *merci* 'ta, va mabig ! »

N'eo ket bravoh, a gav deoh, kristenoh ha muih hervez or yez koz, distaga :

— « Lavar *bennoz Doue* 'ta, va mabig ? »

« Doue ho pennigo ! » ha « Bennoz Doue ! », nag eur hiz vrao ha kristen d'en em zaludi ! Eur hiz vreizég ouspenn hag a dal moarvad kerkoulz ha muih eged « *bonjour* » galleg kaset da zevel e vouez war ar zilabenn genta.

Dalhom d'or gizioù kristen ha breizég... Na lezom netra euz or peadra da vond da goll pa 'z eo talvouduz peb tra el leve lezet ganeom gand or Zent koz...

Pa rankan beza berr — ar mouller a ra dija sellou ouzin — e kimiadan dre rei deoh da gleved eur gêr koant all euz or brezoneg : « *Kenavo ! Kenavo ar henta tro !* » Med na zistagit ket din respont : « *Au revoir ! Au revoir !* » nemed eur Gall e vefeh pe eun dianveziad o houzoud galleg nemedken. « *Kenavo ! ha Doue ho pennigo !* »

Brogarour-Rozec.



Diwar-benn ar Baganiz

Sur oun ho-peus en em houlennet aliez perag e vez anvet *Paganiz* an dud a zo o veva war ar beg-douar a en em led etre an daou bleg-mor, hini ar Vougot hag hini Goulehen, perag e vez greet *Lann ar Pagan* euz parrezioù Gwiseni, Kerlouan, Plouneour-Trêz ha Brignogan.

Meur a hini o-deus esee diroueslla ar gudenn-ze, med kaer o-deus bet furchal ha difurchal, e chom atao gwall luiet ha n'ouzon ket gand piou ema ar wirionez.

Lod a zo eet beteg lavared e teu ar Baganiz euz ouenn ar Skandinaved. Laeron vor ar vro-ze a yee hag a deue a-hed aochou an hanternoz ha douara a rejont meur a dro, posubl eo, er horn-douar-mañ. O gwiskamanchou a dennfe ouspenn da re ar vro-ze ive. Gwall riskluz e kavan ar menoz-se hag hirio ez-eus nebeud o terhel dezañ.

Lod all a lavar e teu *pagan* euz ar ger *paian*, ablamour m'oant *paianed*. Ne gav ket din kennebeud e vefe gwir kement-se : ar Baganiz a bell 'zo a zo kristenien, hag a oa kristenien, kredabl braz, a-raog m'oa staget outo an ano-ze.

Pagan a deu, a gredan, euz al latin *Pagus*, da lavared eo, eur rann-vro war ar mêz, eur ger e-neus roet e galleg *pays*. Entetet e giz-se, *Paganiz* a zo *Paysanted*, tud diwar ar mêz, ha netra ken.

Ar Baganiz a hirio a ziskenn evel-just euz ar Vretoned deuet euz a Vreiz-Veur pe Vro-Zaoz ha douaret e bro an Armorik, a-hed ar hantvedou kenta goude Or Zalver, bleniet gand or zent koz, Sezni, Goulhen, Eneour, Fregant, enoret atao er horn-douar.

Ar Baganiz a zo bet a-viskoaz brudet da veza gwall baotred, kamm o bizied, peñseerien-vor euz ar henta.

N'eus ket pell c'hoaz, aotrou'n Eskob Kemper, nevez degouezet er vro, a houlennas euz eur Pagan a Blouneour en eur farsal :

« Hag atao e vez staget euz kerniel ar zaout, en noz, leterniou evid chacha ar bigi war ar herreg ? »

« Ne vez ket », eme hemañ, « deuet om bremañ da veza sivilizet, hag ouspenn izoumm ebed ken d'henn ober, peogwir laeron-vor an Normandi n'eseont ket ken klask trabas ouzom. »

Mar deo bet gwir ar gaoz-se, gwechall-goz, hirio seurt koaziou n'int nemed farserez.

Gwechall-goz, avad, e hellfe beza bet gwir ? Marteze. Ne gredan ket kouls-koude e oant ken kriz-se ar Baganiz evid chacha ar bigi en noz, evid baerez.

ar peadra a oa enno ha dreist-oll evid laza an dud. Nann, ne gav ket din ez eent beteg eno.

E va soñj, ez eus eun draig bennag a wirionez er haoziou-ze. Evid en em zivenn, eur poent 'zo bet, euz ar « birated Norman », laeron-vor a vicher, a zouare aliez war ar vro, evid laza, laerez, ar Baganiz a hellfe beza en em gemeret en doare-ze. Pa o-deze tro warno, e hellit va hredi, ar Baganiz n'o ratent ket. Evid chacha anezo war ar herreg, e-leh ma torre o bigi o fri, e hellfent beza en em zervichet euz a zaout, gand leterniou euz o herniel, o tond, o vond war an tevinier, e-pad ma choment o-unan kuzet a-dreñv eur roh bennag, prest da zailha war o enebourien.

Eun dra a zo gwir c'hoaz. e Breiz koulz hag e peb leh all, muioh marteze hoaz er vro Bagan, kement tra a zeu d'an aot gand ar mor a oa d'ar re o have, daoust da lezennou ar houarnamant, daoust d'ar valtouterien karget ganti da veilha war gement-se. Den ebed euz an Arvor n'ema e chal da weled an traou a deu d'ar bord sammet gand paotred ar houarnamant. Eul lezenn a zo, med aliez an Arvoriz ne reont foudre kaer ebed ganti : p'o-devez tro e krogont stard hag ar houarnamant a hell sutal war o lerh, nemed tapet e vent.

War aochou Breiz, e tigoueze aliez d'ar bigi en em goll ablamour d'ar reier a gaver war bord ar mor. A-hed ar vro-Bagan, ar herreg a zo stank ha gwall riskluz eo d'ar bigi tostaad euz ar bord heb gaoliata eur roh bennag a zav he fri a-rez an dour. Ar Baganiz o-deus gwelet aliez, a-hed ar hantvejou, meur a vag o tond d'en em goll e-giz-se, dreist-oll pa veze gwall-amzer pe vrumenn. N'dont ket e chal da weled neuze, p'o-deze tro warno, pinvidigeziou ar bigi o vond e godellou ar houarnamant. Den ebed n'eo souezet gand an dra-ze. Pa grogent, e krogont stard, ha kaer o-deze ar valtouterien beza war hed ha kaoud fri, e tigouezent aliez re ziwezad. Estreged ar Baganiz a zo kanfarted war an dachenn-ze.

Soñj am-eus, va-unan, da veza klevet konta ano euz peñse eur vag vraz, eun nebeud bloaveziou goude ar brezel 14. Daoust ma n'oa ket er vro-Bagan oa, peb tra hag a oa gellet samma pe kuzed, a oa dibradet gand an Arvoriz. Barri-kennajou gwin a oa deut war an trêz a oa goulonderet e nebeud amzer, pe kuzet en trêz, da hedall ma vije gellet o herhad heb beza paket. Buan oa red ober. Kement sailh ha kement pod a oa en tiez war-dro a zeue gand an dud ha karget. Eva vije greet ive dioustu, ha meur a lonkad. Lod a n'oa ganto netra da lakaad ar gwin a rede euz ar varrikenn, kentoh-eged gweled anezañ o vond da goll, a leunie o bouteier koad. Pa zigouezas ar valtouterien war al leh, e chome nebeud a dra ha traou goullo hoaz war ar marhad.

Kerlouan, Plougerne, Gwiseni, war a gonter, o-deus bet ive an heveleth « plijadur ». E 1927 batimant ar *Corrèze* a deuas d'en em daoler war kerreg Plougerne. En eun nozvez, daoust m'oa war al leh ar valtouterien ha tud ar vag, dindan o fri e-giz ma vez lavaret, kement tamm koad diskolpet euz ar vatimant, hellfe beza peget enno, evel montchou, bouteier, butun, sier, a oe krapet enno.

Klevet em-eus konta din. En eun ti euz an Arvor neuze, ar wazed, pa zeuent bemdez euz ar park, a veze gwall dommet dezo, ha koulskoude a-dost n'oa ostaleuri ebed. Eun doukennad gwin-ardant o-devoa kavet war an trêz, e-touez ar reier. He huzed o-doa greet en eur hleuz. Beb an amzer, e kavent distiñget terri o zehed heb goud da zen ha dreist-oll d'ar merhed.

Job Seite.



Mem bro e zo duhont

Mem bro e zo duhont, e penn pellañ en douar,
é géol digor ur mor diroll, dé ha noz é kounnar.

Mem bro e zo duhont, mantellet rah é glaz,
en aùél braz doh hé bokein hag é parein hé fás.

Mem bro e zo duhont, léh ma tiwisk bemde
en héol, kent mond d'é wélé blod, brageu é vraùité.

Mem bro e zo duhont, evel ur vag dilui,
e stléj er bed koh ar hé lerh, ar vor er faltazi.

Mem bro e zo duhont, goahiet ha torgennet ;
goleit a goed, goleit a fréh, a esteu alaouret.

Mem bro e zo duhont, hañù ha gouiañù é bleu,
kañù ha gouiañù én hé sulieg, ged kaerded er mêzeu.

Mem bro e zo duhont, dishaval doh peb bro,
ged hé hroézieu, hé feuténieu, hé chapéliu distro.

Mem bro e zo duhont, él léh ma vleu bepred,
adreist béieu er yéheu marù, yéh nerhuz er Gelted.

Mem bro e zo duhont, hoanteit oll ged er bed,
eid nerh-kalon hé zud yaouank ha koantiz hé merhed.

Mem bro e zo duhont, Breih e hrér anehi,
distag dohti ne hellan mui, filimet on dehi !

Duhont éma me hér, kuhet émesk er gwé,
hag a-ziar treuzeu men dor ne wélan meid en né.

Diar treuzeu men dor, un estig e gleùan,
me garehé kanal ken flour er vro gaer a garan.

Loeiz Herrieu (1879-1953).

(Dasson ur galon, 1957)

Va bro a zo duhont

Va bro a zo duhont, e penn pella an douar
e ginou digor eur mor diroll, deiz ha nóz e kounnar.

Va bro a zo duhont, mantellet oll e glaz
eun avel vraz ouz he 'foka hag o floura he faz.

Va bro a zo duhont, e-leh ma tiwisk bemdez
an heol, kent mond d'e wele blod, kaerder e berlez.

Va bro a zo duhont, evel eur vag direol
a stlej ar bed koz war he lerh, wardu hunvreoù foll.

Va bro a zo duhont, goahiet ha torgennet
goloet a goad, goloet a frouez, a eostou alaouret.

Va bro a zo duhont, hañv ha goañv e bleuniou
hañv ha goañv gwisket da zul gand kaerder he mêziou.

Va bro a zo duhont, disheñvel diouz peb bro
gand he hroaziou, he 'feunteuniou, he chapelioù distro.

Va bro a zo duhont, e-leh ma vleun bepred
dreist beziou ar yezou maro, yez nerzuz ar Gelted.

Va bro a zo duhont, aviet oll gand ar bed
'vid nerz-kalon he zud yaouank, ha koantiri he merhed.

Va bro a zo duhont, Breiz a rêr anezi,
distaga diouti n'hellan mui, kiliet on ganti.

Duhont éma va hêr, kuzet e-mesk ar gwe
diwar treuzou va dor, ne welan 'med an né.

Diwar treuzou va dor, an eostig a glevan,
me garfe kana ken flour ar vro gaer a garan.

(Laket e brezoneg Leon gand **Job Séité.**)

Kontadenn Bizai

gand mab an dig

Trede pennad : Kure Bizai

Bizai e-noa troet e benn en tu all. Douetuz braz evid kuzad e zaelou. N'oant ket daelou a hlahar... nann, evel daelou a levenez, a fiziañs... a vall da gavoud adarre, en e di, er bed all... evid eur vuhez peurbaduz, hoaz kaerroh eged houmañ, Soazig, — e bennduig !

A greiz peb kreiz e tizroas ouzin.

« Evom eur banne, Aotrou Kure ! Eur banne a ra vad da zistagella an teod. Daou a zo re, vel ma lavare, va zad-koz... »

Ha goude beza glepiet e lanchenn, ha sehet e vuzellou gand e vañch, Bizai a stagas gand e gontadenn.

« P'oan yaouank, e oe degaset deom eur hure nevez hag a oa eun tam-mig drol ! o, eun den euz ar re wella, med doare aotrou a oa warnañ, ha brezoneg raoulet a gomze. Den ne ouie euz a beleh e teue, med buan a-walh an dud a lavaras : « Evid hemañ, avad, ne jomo ket pell ganeom ». Livet fall oa e zremm ha pourset war ar marhad.

An Aotrou Person a lavare oa eun tammig skuizet e benn. Arabad e vije eta her skuiza re...

Prest goude m'oa erruet eo eh en em gavas eur goz tro gand matez ar presbital.

Houmañ a oa gwall vaouez a-walh anezi !

Pa veze lein ar miz, e halve evid he zikour ar hloher, eur paotr yaouank koz a gichenn, ha na gompren na bu na ba !

Paotr al liziri, d'an ampoent, a oa eul lakepod... leun a droiou kamm oh ober anezañ. Euz a Witalmeze oa.

Ar plah a oa er zal o renka an traou war an daol... p'en em gavas eta er gegin gand e liziri.

Eur pechad feskenñ leue a oa bet tennet euz ar 'forn ha lakeet war an askomb da zidana. Eun ezenn douelluz a zave anezi !

Ar hloher en em gav... digor e hinou... « Sell, eme baotr al liziri, ar plah he deus lavaret deom debri an tamm-mañ, da hedat lein ! »

Ha dao dezi, o-daou, heb fourchetes na netra, gand o hrabanou !

An druz a rodelle etre o bizied, e korn o muzellou, war o chik, war o stomok ! Grig ebed ganto !

Dre ma hellent e tiskolpent, e lonkent ! Kenta m'oa klevet an nor o tigeri. Daoulagad ar vatez, evel diou sparfel war-nez sailha... tan o tond diouto !

Ha... re gal ! A lamm d'ar valaenn. Pôtr al liziri... dipadapa, dre an nor, er mêz !

Hag egile, ar paour-kêz labañ... e 'feskenñou o seni gand baz an taboulin, o nijal a beb tu, evel eul loen pennfollet o steki ouz ar hadoriou, an armeliou, o pilad eur bern traou, beteg ma hellas, ar hêz den, digeri ar prenest bihan, ha lammed war e benn er mêz, e-pad ma kanarche eben, ar hlaourenn ouz he genou : « Kig an aotrouien ! Kig an aotrouien ! »

O lavared edon eta oa an Aotrou Kure nevez, souezuz, eun tammig !

Leun a gaoz a veze gantañ, med atao, e koueze da lavared ar memez tra.

Din-me, evel d'ar re all, beb tro m'en em gave ganeom, e lavare !

« Va zad a oa eun Aotrou braz... M'em-bezo dizale eritaj ! »

Hag 'ez ee gand e hent o soñjal moarvad er pinvidigeziou e-nije, a-harz pell, da grabanata.

E galon koulskoude n'o ket stag ouz traou ar bed-mañ, Brokuz oa. Prest atao da rei eun dra bennag d'ar paour.

N'ouzon ket perag, dre druez pe a-hend-all, ni a deuas da veza on-daou, mignoned.

Klask a reen e lakaad da zoñjal e traou all... med evel an diskan, er hantikou, kenta veze gwelet ar paour-kêz den, o sevel e zaoulagad war-du an neñv, hag o lavared, evel en eur bedi :

« Va zad a oa eun Aotrou braz ! M'em-bezo dizale eritaj ! »

Eur pardaez eh en em gavas amañ, laouen-meur, evel eur pintig !

« Bez' am-eus bet an eritaj ! »

Keid all a oa abaoe ma komzed euz an eritaj ma c'hoarze an dud pa veze prometet dezo eun dra bennag, en eur lavared : « An dra-ze zo heñvel ouz eritaj an Aotrou Kure ! »

Ha setu m'oa deuet pelloh... an eritaj !

Nag a draou a dlle beza bet an Aotrou Kure evid beza kel laouen !

« N'eo ket braz braz va lodenn », emezañ, « med plijoud a ra 'din kenañ. »

— Hañ, ya », emeve, « mall ganen, war va meno, gouzoud, heb kredi koulskoude her goulenn. »

— Eur gazeg, hag eur hi... » emezañ, « em-eus bet evid va lod ! »

— Ha petra hoaz ? » emeve.

— Netra... med ne houlennan ket muioh. Nag a fouge a zo ennon ! Din-me loen va zad ! Din-me ki va zad ! »

E-pad eiz teiz, da vihan, ar re oll a yee d'an traou da glask o zamm butun, ha me, da genta, a rankas mond d'ar presbital da weled eritaj an aotrou kure.

An daelou en e zaoulagad, o diskoueze :

« Loen va zad — ki va zad ! »

Ha goude, gand e joa, e pée d'an oll eur banne.

Lein ar miz a dostee hag an aotrou kure, gleb dour teil, o c'hwezi, eur palouer en e zorn, a gempenne ar gazeg hag ar hi.

Poan gollet siwaz ! An daou aneval a oa eun druez o gweled !

Ne oa warno nemed liou ar vizer ! Ha liou ar vizer ne ya ket kuit gand eur palouer. Ha na pebez anioiu o-doa an daou baour-kêz ! Biskoaz n'am-oa klevet kemend-all !

Ar hi a oa anvet Mastin hag ar gazeg — selaouit mad ! —

A bell 'zo, douetuz braz, oa faout ar girin e familh an-aotrou kure !

Pevare pennad : Maro Mastin

Eur hroheñn frizet a heb liou evel m'e-nivije kemeret eun tamm euz peb loudour a gi bastard a lip an traou brein er goueriou, war-dro Brest ; divesker forgosennet evel treid al lann koz ; skouarniou... unan brasoh kalz eged egile... heñvel ouz daou douseg ; daoulagad sutadell a zelle atao a gorn... peogwir ne hellent ket selled a-hend-all... ha ne lenned enno netra... nemed glapezerez !

Chas Sant-Pabu ne oant ket nehet evid e varn, ar paour-kêz aneval a gi. « Mastin ! emezo, hag e c'hoarzent... Eur grampoezenn... eur glaourennig flêriuz ne gompren na sou na diha... eun azenn luch... » Me a ziverra o respitadenn. Ki ebed euz ar barrez — ha koulskoude n'int ket figuz — ne falvezas gantañ darempredi Mastin, gand aon da goll gantañ e vrud vad a gi !

« Ha ! ki va zad ! ki va zad ! Mastin, na pebez ki... eo ki va zad » a embanne koulskoude d'an oll aotrou kure Sant-Pabu.

Med ne oe ket hir e vuhez e Sant-Pabu, ar paour-kêz Mastin !

Lein ar miz a oa deuet. E sal vraz presbital Sant-Pabu oa renkent klok peb tra war an daol. Gouel Sant-Jakez oa... gouel an aotrou kure. Anad oa e vije dreist al lip-e-bao!

Mari-Jan a zigas ar zoubenn... a zav anezi eun êzenn... eun ezafis a hwez-vad.

Eun daouzeg beleg war he zro a varvailh a-raog azeza.

En eun taol, an nor a zigor a-benn-err... hag a-raog m'e-neus gelllet den lavared grik... e lamm drest an daol evid pokad d'e vestr. Mastin, «ki va zad», siwaz! siwaz! ar hi kropet, re bounner e benn a-dreñv, a grog e zivesker e liñser an daol; ha gantañ, en eur fourradenn, e kerz ar gwer, ar boutailhou, ar plajou... War-nij dindan ar friou, e plañvon!, a-raog mond d'ober braoigou ouz ar speurenn, ar mogeriou, leur an ti!

Soubenn vero a strink a beb tu, rag ar zoubierenn a zo ive sammet hag a gouez evel eun tok, en eur ober plouf!... war benn or Mastin daonet...

Youhal a ra evel ma ve kouezet e tan an ivern... Med' eur person, ruz gand ar gounnar, a blant gantañ, dre ma hell, taoliou botou beteg ma ya er-mêz.

An aotrou kure hebken, en eur ouela, a gerz d'e heul.

«Ki va zad! emezañ, ki va zad! ar paour-kêz Mastin!»

Mond a reas da gerhad eul litrad eol-dibri, ha goustadig hel ledas war e gory devet.

Kaer oa ober, «ki va zad» a hirvoude, a yude, a youhe, a vleuje...

An aotrou kure ne zebras netra d'e lein. A-walh e-noa gand e vilou.

Ar veleien all, en desped d'an dismantr, a gave an dro da c'hoarzin didruez, ya! Person Sant-Pabu e-unan, rag an den santel ne oa stag tamm ebhed e galon ouz traou didalvez ar bed-mañ.

Mari-Jan, avad, a grene gand he imor. En eur zastum an tammou traou tor-re, e hrozmoles... He dent hir ha brein a strake dre ma tibune he malloziou.

«Ki daonet! Ki va zad! An istrimant l'oudour! Chas evel-se, a lavaran-me, ya! Da zutal brulu diouz an ti-mañ! Ki va zad! Kureed e belbi! Ar vaz! ar valaenn, aotrou person, gand traou diempennet!

E-pad an deiz, e-pad an noz, Mastin a hirvoudas.

Ouz e glevet evel o yudal d'ar maro, an chas all diwar-dro en em gloze en o log heb ger.

An dud o-unan a guze o 'fenn dindan al liñser en o gwele.

«Unan bennag a zo fall», a zoñjent, «an Ankou a zo o redez noz war-dro amañ, gand e 'falz...»

Ha d'an deiziou war-lerh e oa heñvel.

«Red eo e laza, rag ne bareo ket», eme ar person d'e gure.

«Red eo e laza», eme ar skolaer ha mignoned all galvet gand an aotrou kure da rei o ali.

Marianna Bistrouilh, an dreserezh, a ouie louzaoui leun a gleñvejou, a oe galvet ive d'he zro.

«Netra d'ober», emezi. «Ma vije bet devet gand dour bero hebken, ne lavaran ket, gand eur zoubenn zister kennebeud. Amañ ne hellan netra. Ar zoubenn he-deus e zevet a oa re zruz. Sellit, aotrou kure! Dre ar gouliou e weler an druz o tond er-mêz!»

«Ya, avad, gweled a ran», eme an aotrou kure. «Paour-kêz Mastin! Ki va zad! Ki va zad! Laza ki va zad! Nann! Nann!»

Hag e pake d'ar hi, ken e pake druz war e vuzunou, ar paour-kêz kure. Ha Mastin a droe war-du ennañ e zaoulagad du ne lenned enno tamm skant-vad... hebken eur boan spontuz.

An aotrou kure ne gouske mui. Yer ar presbital, strafuilhet, n'o-doa ket mui nerz a-walh evid defi... ar pezh a lake ar plah da vond muioh-mui en egar.

Bourkig Sant-Pabu e-unan, ken koant ha ken laouen, a gemere liou ar haoñv, ha da zul, pa ehaned da gana, e-pad an overennou, e klevet euz an iliz, o sevel truezuz, klemmadennou doaniuz Mastin, ki an aotrou kure.

An aotrou person a oa eun den euz ar gwella. Eun den a skiant-vad oa ive. Re bell oa padet an istor.

«Petra fell deoh», emezañ. «grit a gerot gand ho-ki. Evid amañ ne jome ket eun dez muioh.»

— Ki va zad, aotrou person, ki va zad! Soñjal a rit? Ki va zad!»

Med sentuz oa ar hure. Plega a reas d'ar zetañs. D'ar pardaez e teuas ar mâr, gantañ eur fuzuilh.

An aotrou kure a oa en e gambr o ouela.

Diskenn a reas hebken p'oa greet an taol. Eñ e-unan a falvezas gantañ toulla e vez el liorz harp e ti-fourn Landegarou.

En eur deurel warnañ paladennoù douar, an dour o redez puilh war e jodou, e kendalhe gand e litanioù: «Mastin, ki va zad! Mastin, paour-kêz ki va zad!»

D'an deiz war-lerh eñ eas war vale da Lanniliz da brena daou wennegad had bleuniou kaer da fakaad war ar bez.

(Da genderhel.)



K	U	D	E	N	N	O	U
O		I		N	I	Z	
A	B	A	D		J		L
R	A	N		D	A	L	E
A	L	A	N	A	D		I
	I	O		R	E	I	Z
G	O	U	L	E	N	N	
L	U	D	U		N	E	O

GERIOU - KROAZ

Diskoulm da gudenn an niv. 110

A-led.

- I. N'eo ket gwelet mad gand ar merhed di-mezet.
- II. Harpa.
- III. Preder. — Eur grouadurezh (kemmadur).
- IV. Rei an urz.
- V. Artikl. — Rak-se.
- VI. Eeün (mad en e zav). — Euz a verb ober.
- VII. Dimezi. — Atao daou-ha-daou.
- VIII. En eur ganaouenn e vez peurliesha meur a hini.

A-bik.

1. Hegaser.
2. A hell beza mad pe 'fall.
3. Artikl. — E Roazon.
4. En e led.
5. E Kraoñ.
6. Kustum da vond d'ar bellhadegou.
7. Liamm. — Kole.
8. Terri. — A heller d'ober heb poan.

	1	2	3	4	5	6	7	8
I								
II								
III								
IV								
V								
VI								
VII								
VIII								

Ar mel alaouret

E va liorz ez eus eur gest gwenan, doare tour iliz Kalon Zakr Paris ganti, an doare hebkén. Gwall zister eo, grêt gand kolo ha dréz. War he 'fenn, da vired ouz gaou ar glao braz hag an heol re domm, golo houarn eur hoz pod-soubenn ét da netra ; da ziazez dezi eur mên plad stag outi gand pri-prad da vired ouz al logod, ar c'hwiled, al laouennou-dar, ar hevnid hag amprevaned a beb seurt da vond er gest da laerez ha da laza. Eun toullig hebkén a zo er gouriz pri d'ar gwenan da vond ha da zond. Dor ebéd ouz ar palez-ze.

Eur palez, ar hoz ti soul ze ?

Ya, rag renet eo gand eur rouanez. Daoust da zianvêz an ti beza paour, n'eus diabarz palez ebéd, savet gand an dud, ken kempenn hag hini va gwenan.

Ped ha ped tro, n'ouzon ket, em eus klevet mouez ar rouanez o hervel gwazed ar palez !

« Alo ! pôtre, it d'ober eun dro dre bevar horn ar mêziou. Gwelit peseurt amzer a zo hag a gav deoh e vezo. Gwelit ha savet awalh eo an heol en oabl da rei goulou ha da vired na vije rivet va gwenanigou gand o hutuilh. Sellit m'ad ha gliz a zo war an deliou ha war ar bleuniou. »

Hâ pared ar palez da nijal er mêz, euz ar zav-heol d'ar breizteiz, d'ar huz-heol, d'an hanter-noz ha da zond difre endro da rei d'o rouanez kelou.

« Digatar an oabl, emezo ; begad avel ebéd ; kelh an heol a gresk o vounta dirazañ koumoulou taño, boued-heol netra ken hag a vezo lonket e berr amzer ; balzamet eo an êr ; eun dudi eo selled hizio ouz douar Breiz-Izel.

Deliou ar gwez a zoubl o 'fenn dindan samm ar hlizenn ; ar fleur, pounner c'hoaz o harrennou, a zonnfe abenn nemeur hag a zispakfe o bleuniou. Doare 'zo e vezo kaer kenañ an devez. »

Daoust da grampeier ar palez beza diniver, eur wenanenn e peb hini, ne oe ket a zale gand ar helou laouen en em gaoud ganto oll. Ha peb gwenanenn d'en em zifreta. Ken sentuz int ouz o mestrez, kemend a urz a vez gand o labour ma ne glever rebech ebéd, devez ebéd, a lezirêgêz.

Rebech ebéd ? Eo, awêchou, hini klask paka peb blaz, peb c'hwez, peb liou.

O gwelet em eus, heb damanti ouz o 'foan, o skuizder, o koueza koulz lavared dindan samm o bêh dirag toullig ar gest evel mezevet gand c'hwez ar bleuniou hag evaj al likuriou e douder peb fleuernn, doare, gand kalz anezo, eur voullig livet o koueza euz an neñv, lod gwenn-kann, evel erh pe olifant, lod du-pod ken du hag eur hlaouenn, lod ruz-tan evel eur gerezenn, lod all glaz-kaol, pe hlaz-ruz, glaz-rouz, ha lod melen aour, dezo da veza bet oh en em rodella, gand ebat, e bleud ar bleuniou.

O gwelet em eus dibabet ganto oll liviou an douar : rous, gell, briz, mouk, marellet, louet ; oll liviou ar ganevedenn : glaz-ruz, indigo, bleuñ, gwer, melen, livoranjez, ruz.

Gwisket en doare-ze evel priñsezed e tigasent d'ar palez oll blazennoù, oll saouriou plantennoù va bro Leon.

Gand an traou kaer-ze, gand an traou mad-ze va gwenanigou a aoze mel alaouret, ennañ mesk-ha-mesk blaz, c'hwez, liou ha vertuziou an dero, ar brug, ar balan, al lore, an ilio, ar pér, an avalou, ar hérèz, ar sivi hag all.

Eun devez, avad, tost d'am zi, war orjalennou an elektrisite, gwennilied a oa bodet, eun ugent bennag oant. Hanter kant da nebeuta oant d'an devez warlerh. Ped a oa anezo d'an trede devez ? N'em bije ket gallet o niveri kent stank oant war beh orjalenn. Med, d'ar pevare devez, gwennili ebéd ken ; nijet kuit oant warzu ar broioù tomm.

En o lerb, war an orjalennou, dridi a verke deom edo an heol o vond da vouza ouzom a zeiz da zeiz, goulou an deiz da 'feneanti, war wasaad bemdez, o sevel diwezad hag o vond da gousked kent hag an abardaez, ar glao da goueza aliesoh ha puilhoh puilha, an avel d'ober he zroug hag he reuz. Ar miz a zeu a vije du, hini warlerh kerdu.

Lopa 'ris, a daoligou, war gest va gwenan.

« Et e kuit ar gwennilied ; en em gaved an dridi. Ema eta an hañv echu, an diskar-amzer o kregi hag, heb kalz dale marteze, ar riou hag ar hleñvejou a vezo prest da zailha war an dudigou a zo ahanom. Bez ar vadelez, o va roua-noz, da rei din euz ar Mel alaouret a zo, sur oun, founnuz e krampeier da vugale hag a zav anezañ eur c'hwez ken mad. Ne houlennan netra all en tu all d'ar pezh a vezo awalh, a gredan, din da gaoud e va gwad nerz da vired ouz ar hleñvejou ha da enebi outi.

Tud kriz a zo, henn gouzoud a ran, hag a lammfe diganeoh, gwenanigou, ho puez zoken evid laerez frouez ho labour. Kenetrezo e reont seurt torfejou.

— A galon vad, en an' Doue, roit din eur guchennig mel. Evel da beb bloaz.

Eun dornadig koar a yafe ganen ouspenn d'aoza eur houlaouenn a lakin war elum dirag skeudenn ar Mabig Jezuz da boent Nedeleg. Eur goulenn am eus da ober outañ : ma vezo ar bloaz a zeu eur bloavez a eurusted evid oll dud an douar, eur bloavez a beoh eta d'an dud a volonteze vad, eur bloavez a vel alaouret a roio da neb e dañvo eur spered dous hag eur galon aour. »

Ha rouanez ar palez plouz a respontas ahanon.

« En da zorn e welan skourrou balan, ha raden, ha gouzer. Gouzoud a ran eta, emaut o vond, evel boaz, da vare-mañ ar bloaz, da joucha tomm on tiegez, deom da hoañvi evuruz, krisa goañv a vije.

Soursial a rez, epad an amzer vrao, euz ar reuzeudigou a zo ahanom hag e klaskez, gand karantez an tu da espern deom poaniou yud ar yenien. Hag e nahfen ouzit eul lodenn euz va mel alaouret ? Oh ! nann, emezi. »

Eur podadig mel a zo e va arbel n'en eus ket koustet din beza kastret tro ebéd. Ar c'hwez-vad anezañ a glever e peb korn va zi.

Va goulou koar, avad, ne 'z eus ket ken anezañ dirag kraoutig Mabig Jezuz va 'farrez ; ét eo e moged evel, mistouet, ar garantez etouez an dud, rak n'ema ket c'hoaz, allas ! ar peoh o ren war an douar.

Mab Koad an ed.




FURNEZ AR RE GOZ

Micher al laer a ve tentuz
Ma ve ganti peoh paduz !
Med ar peoh ganti, 'n hini vank
Rag pig pe vran diwar ar brank
A glev pe wel, a ziskuilh
Eur vicher 'zo leun a drubuilh.

Madou deut dre an hent kamm
A vihana tamm ha tamm.
Hag al laer, ma varv pinvidig
A lez bugale reuzeudig...
Rag atao malloz Doue
A gouez warnañ pe war e re,
Heb konta c'hoaz ar beh pounner
A zougo dirag ar Barner !

Gwerz ar mevel maro



1. Eur paotr yaouank, siwaz ! e-unan ' oa chomet,
Kollet gantañ e oll dud war-lerh eur gwall-gleñved.
2. Er vrasa dienez, seurt ne gredas goulenn.
Nemed dezañ an dud vad ' roas an aluzenn.
3. Eun den euz ar hanton, eun den euz ar harter
A zeuas d'e weled prim o kleved e vizer.
4. « Deuit », eme an den-mañ, « d'am zi da labourad. »
— Allas ! respontas ar paotr, n'em-eus ket a zilh.
5. « A dra-zur e houzon labourad an douar,
Med me zo eur paour kêz den : n'em-eus na pal na marr.
6. « Pevar skoed a vank din 'vid gelloud o 'frena ;
M'o roit din davedoh 'z heb mank 'vid ho pèa. »
7. Mond a ra davetañ evid eur maread ;
An den yaouank-se, avad, a ouie labourad.
8. Med eur wech an tieg 'n em gavas gwall-nehed
O klask gouzoud e peleh ' oa ar mevel chomet.
9. 'N eul lochig a-gostez, war eun dornad kolo,
Eur pennadig goude-ze e oe kavet maro.
10. Hag an tieg, siwaz ! e galon didrue,
P'edod o kas kuit ar horv, d'an oll a lavare :
11. « D'an neñv sur ne day ket, ken 'm-bo bet digantañ
An tamm-arhant n'eus ket pell am-eus prestet dezañ. »
12. Benn eun tri deiz goude, eun den ' oa digouezet
Da glask labour gand ar mestr, hag e oe deañ roet.
13. Er park e ra kement hag an tri gwaz gwella ;
Med pa 'z eo poent mond d'ar pred diouto e pella.
14. Chom a reont sebezet hag ez eont d'e bedi
Da zond prim ganto d'an ti da eva, da zibri.
15. Mond a ra a-gostez ! vel o houzañv poaniou,
Ha d'an douar ' h en em strink kerkent war e henou.
16. An tieg didruez, gwall-vantret e galon,
'Ya da gaoud eur beleg mad : « Demad, aotrou person.
17. « Du-mañ 'z eus eur mevel a ra kement ha tri,
Pez am lak ' souezet-braz, heb eva na dibri. »

18. D'ar gêr distroit buan heb bruda ar hela ;
« 'Benn warhoaz d'ar memez eur d'ho kweled me ' yelo. »
19. Antronoz ar beleg dre hras 'n Aotrou Doue,
Perz ha galloud en-doa bet d'anaoud 'oa eun ene.
20. « Petra a 'fell d'i-te, petra ' glaskez amañ ? »
— Pevar skoed am-boa-me bet digand mestr an ti-mañ.
21. « Ya, gand mestr an ti-mañ 'oant bet din-me prestet,
Gand va labour, beleg mad, d'o fêa oun deuet.
22. « Ha n'em-bo ket aotre da voned d'ar foariou,
Med dond ' rafe va êl-mad da zigas ar helou. »
23. Pa zeu 'n aotrou person evid rei an arhant
Eo skoet an tieg fall 'n eun doare dizamant.
24. Da gemer an arhant, e zorn 'n-deus astennet :
E vreh zehou beteg e skoaz d'an douar zo kouezet.
25. « Kenavo er joaiou, beleg trugarezuz !
Mil bennoz Doue deoh c'hañ, bremañ e vin eüruz !
26. « An tieg 'h eus pêt, seurt dezañ ne voukan ;
'Leh lared droug euz an den, pedit Doue 'vitañ. »

Gwerz koz dastumet ha kempennet gand **Yeun ar Go.**



furnez ar re goz


A-barz konta war zikour Doue
Diouz ho kostez poagnit ive.

Gand esperañs ha dour yen
E vez bevet meur a zen.

Keid ha n'ho-po ezomm ebed
C'hwi gavo kalz a vignoned ;
Pa zeu avad barrou avel
Kalz mignoned a dro banniel.

Gwelloh kelenn mabig bihan
Eged dastum madou dezañ ;
Med skiant an oll skianchou
Eo deski mad hent an neñvou.





E Bleun-Brug Pont-'n-Abad